

XI

En hor c'hoajou z'euz guez dero,
Avel biken n'ho diskaro :
Gant ho skoazel, biken e Breis
N'hellou mervel grisiou ar feis.

XII

Pa erruo heur ar c'himiad
C'hui glozo deomp hon daoulagad :
Hon ene pur dijadennet
Ganeoc'h d'an env a vo douget.

P. N.

IMPRIMATUR :

Quimper, 29 Septembre 1911.

A. COGNEAU,

VIC. GÉN.

Brest, Imp. r. Château, 4

8N2-4-056

CANTIK SANT TUGDUAL

☐☐☐ Saint-Pabu

Diskan :


Sant Tugdual, patron karet,
E Sant-Pabu dalc'hit bepred
Gant karantez d'ar guir Doue
Feiz talvoudus 'vit hon ene. } bis

I

C'hoaz bugelik gant Doue galvet
D'eur manati oc'h kimiadet
Vit grizienna en ho kalon
Guirionesiou ar Religion.

II

Gant eur vagik euz Iverson
E tiskennit e bro Leon,
Evit dignass da dud Arvor
Euz ar feis ar brassa tenzor.



III

Hag o preseg eun tam bep tu
E tremenit dre Sant-Pabu,
En eur skigna var ho roudou
Kalz levenez, kalz burzudou.

IV

Sant Tugdual, dirag J. sus
Ho pedennou a zo nerzus :
Obtenit deomp gant he c'hraçou
Bale eb aon varzu n'envou.

V

En o'ch henor evit boked
Ni ginigo bleuniou an ed
Kleiër ar bruk, fleur ar prajou,
Gantho dreist-oll or c'halonnou.

VI

Ar vam pleged 'bord ar c'havel
Ho meuleudi 'gan d'he bugel :
Oc'h hano douç hen rent laouën
'Vel er mintin ar sklerijen.

VII

A bep danjer prest d'hon diouall
Pellaït ouzomp ar skueriou fall :
Grit ma reno darre n'he blaz
Skeuden Jesus stag ouz ar groaz.

VIII

Roït ho pennoz d'hon tiegesiou,
Kreskit an eost var ar meziou ;
D'al labourer var en ero
C'hui c'hell douçat ar boan c'huero.

IX

Pa vez hollet bars er vrumen,
Ar pesketour deoc'h 'ra peden :
Aliez dezhan c'hui ziskuezas
Ent he vagik var ar mor glas.

X

Hirio d'ar feis bars e bro Hall
'Rer brezel kris ha disleal :
'Pad ar stourmad euz bar an env
C'hui hon rento dispount ha krenv.